



KANTIC

Ann Itron Varia an Drenec

DISKAN.

*Itron Varia an Drenec,
Eur zell var ho pugale,
Euz ho kaloud n'eus ken menec,
On diouallit noz ha de.*

1

Mari a zo mam da Zoue,
Rouanez ar guerc'hezet ;
Jesus, hor zalver, hor roue,
Gant-y a zo bet maget.

2

Mari, leun he daouarn santel
A c'hrassou nerzus meurbet,
Var he zervicherien fidel
Gant joa e vezint scuillet.

3

Hi zo puroc'h 'vit peb hini,
Guenoc'h 'vit bleuniou an Ee ;
Deut 'ta a galon d'he fedo,
'Vit beza chast ha pur ive.

4

Ouspen, gant he zroad benniget
A flastr he benn da Zatan,
Gant-y ni vezo delivret
Dious he flemm hac he halan.

5

Henvel deus ar verelaouen
He zal splamoc'h 'vit an aour,
A ra iec'het d'ar glanvourien
Hac esperanz d'ar pec'hour.

6

Mari, c'houi zo advocadez
Evit domp dirac ho Mab,
Ni neus diganoc'h levenez
Pa c'houlomp ann amser vad.

7

Mari, ni ho ped kalonec
He h'or brassa ezomou ;
Ni ia d'ho chapell d'an Dreneec
Gant ar processionou.

8

Mari, c'houi lenn en hor c'halon
On devotion scrivet.
Epad ar Revolution
Ho ti zo bet diskaret. (1)

9

Ha brema, ô pebeus burzud !
Savet eo a nevez flam ;
N'oc'h ket dizonjet gant an dud,
Evit domp oc'h ar guir vam.

10

C'houi zo c'hoas mam an oll-remed,
Pedit 'ta ho mab Jesus
Da belaad ouzomp ar c'hlenved
Zo dre ar vro ken spontus.

11

Pa z'oc'h merc'h da Santez Anna,
Ker karet en hor c'hanton,
Deomp gant fizianz da bardonna
Da zeiz hoc'h assumption.

(1) Historique.

12

Da fin gouere ho Mam santel,
N'eus pardonniou kaer meurbet,
Pelerinet demeus a bell
A c'houl graçou hac e fed.

13

Mari he z'eo dor an Envou
Dreizi eo mont da Jesus ;
N'er sarromp ket dre bec'hejou
Hac e vemp un deiz eürus.

14

Itron Varia an Drenec,
Eur zel var ho pugale,
Euz ho kaloud n'eus ken menec
On diouallit noz ha de.

Propriété de l'auteur : H. LABORY.

Clohars-Fouesnant, 28 juillet 1881.

IMPRIMATUR :

DU MARHALLACH'H.

Vic. gén.